



HISTOR ADMIRABLE DE SANTÉZ HELENA

SAINTÉZ HELENA
EST UN ESSAI DE DRAMATIQUE

PAR YAN GUERIN.

C. G. R. M.

Brema e feli din disclerie.
Ar vuez Santez Helena e
Bezit attentif d'e c'blevet; o Iezus
Ho calon sur a vo touchets il sov'a

Clévet a refot e bœz
Carguet eus a dristidiguez,
Hac ar martir e deveus bet,
Hac a so ganti c'hoaryezet.

Me lavaro d'êch pen-da-ben
E voa hi caëra femeleñ
A guement a vije cavet,
Gant ar bed oll voa enoret.

Beza voa' vrassa qualite,
Pa voa hi merc'h da eur Roue;
Rac merch'h voa d'ar Roue Anton,
E Constantinopl voa e droñ.

Pa voa Pab e Romi sant Clement,
Eones a voa ens e c'herent,
E vœ bars er bed-mä gaouet
Er blayes pêvar c'chant ha dec.

SAINTÉZ HELENA

PAR YAN GUERIN.

C. G. R. M.

Gouide an Incarnation
A Jesus, hon Roue-güigion nesp sov a
Er guær eus a Constantinopl
Hac estimet bras gant ar boblaï sell.

Pa vœ en oad a bemzec vloassig sell
He mam diganti à varyas, sov a vœ
Ma fellas d'e zad e c'havetnamet sell
Evit ma vije e bried.

Mont a eure da gaout ar Pab,
Hac en esper cayet e c'hrat,
Evit caout e gonsantamant nom jis
Da zimezi d'e verc'h yaquanqo tuis.

Ar Pab neuze pa er c'hléyas,
A respont gant eun horror bras;
Peléc'h m'ar c'christen var ar bed
A guemerfe e verc'h da briep?

Gant an Ijis eo disennet,
Ha gant Doue eo ordrenet,
Na vezò jamez euyeujet
Eun tad d'e verc'h james nepret.

E ve dimeet eur **verch'** d'e zad,
Ennes zo eur c'hrim execrapl',
Eur c'hrim a enep ar lezen
Siouas, etouez ar gristenien.

P'e devoe clévet **Helena**,
Ec'h arruje sur quement-mai,
Var ar mōr en em émbarqas,
Hac e Flandres en em rentas.

Eno pa voe hi arruet,
En eun eclus en em rentet,
Pa voe tost da eun abati,
E commandas son ar c'blec'hi.

Neuze au oll leanezet
A voe qerqent bras estonet
O clévet ar c'bley় o son,
Hac int mont oll en oréson.

Hac int mont ha sellat neuze
Piou a voa éru er c'hontre,
Ma remerqjont eur femelen
A zeue d'ho c'habout pen-da-ben.

Mont a rejont e procession,
Gant respèt ha devotion,
Evit monet d'e rancontri;
Gant eur jou vrás d'e saladi.

Ha pa velas hi aneze,
E voe estonet bras ive,
Hac oc'h o guelet a vänden
O tont d'e rancontr evellen.

Neuze recevjont anezi,
Ha conduct d'an abati;
Hac guelet a rent oll certen
E care an Autrou souverein.

Mes na chommas qet pell gante,
E chenches timat a gontre
Dirac ar roue Catebron,
Euu den cruel ha dirézon.

Mout a eure var bord ar mor
Evit sovetei c'efor,
Hac e pédas merdaidi,
Mar plich ganeoc'h va ambarqi.

Un dra derrubl a erruas
Pa voant e creiz ar mōr glas,
Rac an dud oll a voa lazetz
Gant ar c'horserrien arraget.

Exceptet Santez Helena,
A voa eur femelen ar gaëra;
O sonjal cavet e guerc'hdet,
E voa hi ganto rezervet.

En oréson en em laqas,
Da Jesus en em recommandas :
M'ho ped, va Jesus, va Rone,
Conservit va virginite.

Pa voa achuet e seden
D'hor Zalver Jesus evellen
Un tan eus an Eé a goesas,
Al lestr hac an dud a losqas.

Hi voe preservet gouscoude
Gant ur planqen, dre c'hrac Doue,
Ec'h arroas e rivier Sign,
E qicheunie bord eur Jardin.

Ar rivier' ye bête Londres,
Hac eno e voa eur verjes,
Hac ur feunteun gaer a gavas,
En e c'hichen e tisquizas.

Ar roue Herri e guelas,
Bars en eun dristidiguez vras,
Azeet etal ar feunteun,
Ha ne voa den en e c'hichen.

Tostat a râs neuze outi,
Hac e c'houlennas digant ;
Livirit din presantamant
A belec'h oc'h merc'hiq yaouanq.

Me zo eus a Gonstantineopl,
A guerent pinvidie ha nobl,
Hac a zo ama achappet
A dre daouarn ar barbaret.

Ah ! va c'halon a fazi din,
Rac naon a meus ne allan mui ;
Pell bras zo n'emeus débret tam
Ha va c'halon em c'hireiz a rann.

Ar roue Herri p'e c'hlêvas,
D'e Aumonier a gommandas
Monet pront da guerc'hat dezi
Peadra vit e soulaji.

Neuze en e c'bassas gantâ
Ebars en e dy da loja,
Hac o tont d'e recommandi
Evel unan a dud an ty.

Goude-se e voent demezet,
Souden e voe grêt an euret,
Hac ar fest a bâdas gante
Betec au nombr a uguent de.

Daou vlaves antier ez int bet
Ea o slijadur assuret,
Qen en em gavas dougerez,
Neuze e devoe goal vuez.

Digant e mam-gaer, ar Zantez,
E devoe cals a baourenteñ;
Herves ma rapport an histoar,
E devoa calz eus a c'blac'hâr.

Ar roue Herri a yas timat
Da gaout an tad sântel ar Pab,
Evel m'en doa recommandet
D'ar gombat ouz ar Sarazinet.

Lezel a eure en secret
Tri verq er gær eus e gachet :
Rei ras unan da Helena,
Un all da Vari Clocestra.

An dredre neuze a roas
D'ar C'hont a voa e vignon bras,
Da bini e recommandas
E briet gant affection vras.

Glac'hâr vras a voe er pales,
O lavaret adieu assambles,
Hac epad eiz vloa varnuguent
N'en em velint sur e nep hent.

Helena e devoa ganet
Daou vuguel a voa caér meurbet ;
He mam-gaer a roas da gredi
Penos e devoa bet daou guy.

Ar roue Herri pa glevas,
A voe certen estonet bras,
O clevet e devoa ganet
Daou guy evelse e briet.

Neuze e voe hi condaonet
Da gaout e brec'h deo troc'het,
Hac amarc' e bugale
Unan dezi a bep coste.

Ambarget voe var ar môr bras,
Ebars e Breiz e tisqennas.
Al lestr en devoa e digasset
Da Londres a zo returnet.

Cri vije'r galon pa yoelje,
Oc'h e gnelej nep a vije,
O rei da zent d'e bugale,
Hac hi prest da vovel digante.

Da gousquet pa en em loqas,
Daou leou eus ar c'hoat alzenas;
Hac a gassas an daou vuguel,
Qement-mâ certen voa cruel!

Un Ermit a voa neuze'r c'hoat,
Ha diouz ar c'hort a zeuas timat;
Hac a gavas an daou vuguel
Etre griffou daou leon cruel.

Unan anê Brie a hanyas,
Eguile Martin a c'halvas;
O daou e voant gantan maguet
Epad c'hoezec vloas assuret.

Ebars epad an amzer-mâ,
E voe e Naonet Helena,
Hac un hostises a gavas,
Truez outi a guemeras.

Chom a eure da zervicha,
Ebars an ty voa'n disterra;
Dispriset voa gant pepini;
Laqet voa da dorcha listri.

Ober a rô gant dilijanc,
Hep na rebel na repugnanc,
Qement a ordrenet dezi,
En o rô oll hep contraigni.

Guelit amà greg eur Roue
Carguet demeus a baourante,
Rentet qen humbl ha qen izel
Dirag ar bed universel.

Sellit brema 'n humilite,
Hounez a blich bras da Zoue,
Rac an humbl a zo exaliet,
Hac ar superb zo discaret.

Ar roue Herri distro a Rom,
Ha ganta ar roue Anton,
A erruas en e bales
Ebars ar gær eus a Londres.

Allas! eno pa eruas,
Ar c'hort Clochester a gavas,
Ha goulen neuze diganta
Peleac'h voa eat Helena.

Nao messager voa digasset
Dirac ar Roue da lavaret
O doa digasset pep a liser
D'ar c'hort Clochester a dra scler.

Mes eun all a zeuas goude,
A lavaras ar virione,
Penos e voa bet trabisset
Gant ar Rouanez coz assuret.

Ar rouanez coz zo condaonet
Da veza en beo losqet,
Abalamour ma e devoa
Laqet trech'i brec'h Helena.

Me lavaro deoc'h ar recit
An daou vuguel hac an Ermit,
Ha penos voe an disparti
Ebars er c'hoat gant calz a gri.

An ermit var bord ar rivier
A yeas gant an daoe vuguel;
Aman, emezan, o qiyis,
Ganen d'am zy ho tigassis.

An daou vuguel à respontas
D'an Ermit outi pa gomzas;
N'en dé qet c'houi-ta, Ermit-mat,
Eo a zo a dra sur hon tad?

An Ermit neuse a lavaras
Deze gant tristidiguez vrás,
Allas! m'ho cavas amàn lezet
Etre bleizi ha loënet.

Ha gant truez m'ho tigassás
Ho taou ganen d'am ermitach,
Hac emeus iveau ho maguet,
Kec'h elevet hac instruet.

An daou vuguel a lavare
An eti d'eguile aneze;
Fa n'en dé an hermit hon tad,
Deomp-ni bremâ da glasq hor mad.

An ermit a voe trist m'neurbet,
Pa o c'hlévas o lavaret
E zajent, allas! da glasq o mat,
Pa na voa qet eu voa o zad.

Pa voant o tisours evelse,
Erruout merdaïdi ene,
Bremâ ez eus c'hoëzec vloa
E leqezomp ama Helena.

Gant angen vrás digonsolet
D'e daou vuguel e doa collet,
N'e devoa brec'h nemet unan
a zicour daou vuguel bian.

Neuze e lavaras Martin,
Brie, va breur, deomp bete'r fin,
Elec'h ma plijo gant Doue hor c'hass,
Ma cavimp hor mam eur vech c'hoas.

Merdaïdi, ni ho suppli,
Plijet gueneoc'h hon ambarqi,
Ma zaimp en hano Doue
Da glasq hor bro hac hor c'hontre.

Ar Merdaïdi a respontas
D'an daou vuguel pa o c'hlévas,
Deut en hon lestr hac ambarqel,
Ni ho laqaï en douar assuret.

En Allemagn ec'h arrujont,
Hac arc'hant dezo a rejont;
Ouspen e rejont da lema
D'an daou vuguel gaat calz a joa.

En Baviere pa voant arru,
E zeont o daou a ru da ru,
Ma o guelas ar Rouanes
Ebars er ru eus e fales.

Ma gommandas d'e messager
Mont da guerc'hat an daou vuguel,
Rac quer caér oant evel an de,
Clorianda o admire.

Digasset oant neuze dirazi,
Roet e voe deze da zibri;
Neuze evel tud affamet
Ne squizent o tebri o boëd.

Re hir ven ma confen antier
Ar brezel voa er bro Bavier,
Mes beza voant victorius
An daou vuguel, dre c'hraç Jesus.

Martin a voa eun den vaillant,
Hac ebars er gombat sanglant
Laha a reas calz a Sarazinet,
Ha calz eus an Turqianet.

An Itron Varia Bojoigne
O sicouras sur an deiz-se,
Hag evit caout ar victoar
Dre c'hraç Jesus var an douar.

Da Dour e teujont ac'hane,
Eur gaer a so en Tourene,
Sant Martin a voa aumonier.
Da reï soulach d'ar beorien qer.

O mam iveau a errnas
En Tour gant eur baourante yras,
Pa voa Martin o tistribui
An aluzen da bep hini.

Goulen aeure diouti,
Pa deuas da zellet outi,
Pe a lec'h oc'h-hu d'ent amâ?
C'houi n'en d'oc'h qet eus ar vro-mâ.

Commanç a ras neuze e galon
Da zonet d'e bigat qen don,
Neuze e teuas sonch dezâ
Ebarts en e vam Helena.

Dinguent en devoa clèvet,
Evel ma hon eus rapportet,
E voe troc'het eur vrec'h dezî,
Hac en dont da zonjal enni.

Neuze en em anavejont;
Gant joa yras en em saludjont;
Autrou Jesus, eme Helena,
Va bugale guès a yelân.

Ne zeziren qet qent mervel,
Nemet guelet ya daou ynguel;
Autrou Jesus, Roué an Trôn,
Homâ zo consalation,
Da eur vam e devoa collet,
He daou buguel e deus cavet.

Adieu, emezi, va bugale,
Mont a ran bremâ en han' Done,
Ho pet ac'hanon sonch a memoar,
Va bugale guer, var an douar.

M'em bezo sonch ac'hanoç'b ive
Pa vin e rouantelez ou ëe,
Evit ma vezimp oll assambles
Er Barados gant an zèles.

FIN.



CHANSON
POTRET PLOUILLAU

Var ton : *Adieu, Pontrœo.*

M'am bije sperêt da gompren, evel a meus fantazi,
Me a vije n'em impliet da zonet da goñposi
Eur c'hiinit leun eus a c'hlaç'bar, grët da gonscrityvet
yaouanq
O deus tennet ar billet du ebars er blaves prezant.
Ebars er bla mil eis cant c'hoec'h, ar bemp a vis guen-
golo,
E zeo digueet adare eus a baros Plouillau
Tud yaouanq evit an arme, tud eus ar re derrupla;
Glac'haret é o oll ligue, p'o guelont o partia.
Da bartia gant an actif ne zeus qen nemet pévar :
Ervoanic Jacob, eus ar bourg, ha Guiljan ar Meledar,
Ha Yannic Prat eus ar Goajou ha Pipi an Aveant :
Pévar den eus ar re vrava, corfou caer ha tud vaillant.
Ervoanic Jacob a lare en deiz-se d'he gainarad :
Em'a zo un devez trist hac a ra din calonad!
Guelet va mam baour o vouela, ha va zad qèz desolet !
Va c'halonic ebars em c'hreiz zo dija qazi rannet.
Calz a sonehfe dë, marteze, penos e ven eur poltron,
Em be aon rac eun ten fuzuil pe rac eur voufed canon,
P'otramant aoun rac ar fatiq, o vale dre an hentelhou,
Pe gousquet var eur guele can ebars er c'hordegardou.
Douguen va dillat var va chouq, va fuzuil ha va zabren,
Bale bemde a guér da gnér dre ar fanq hac ar vouillen;
Ha gonde e fin va beach rancout marteze campi,
Pe gousquet var an douar yen, pe otramant bivoaqi.
Tor o deus an neb a sonch se; ma c'halent lenni eni
c'halon
Evit guelet va bolonte ha va inclination,
Ma ua fotfe nemet va goad, me en scuilfe tout joaüs
Evit souten bon Impalaër, eun tad quer carantezuz !

Piou na gombatfe qet hardi gant un Impalaër christen?
Eur gaus quer just hac e hini a zo faci da zouten,
Pa zomp mémprou da Jesus-Christ, soudardet an Aviel,
Bugale da Zoue an Tad, templou d'ar Speret-Santel.

Arça eta, camaradet, qent quittad eus hor c'hontre,
Demp ni da ilis Pôuillau da suplia hon Doue
D'hor preservi demeus goal chanç pa vezimp en armeou,
Ha da gonsoli bars er guér hon tadou hag hor mamou,
Adieu déch', Autrou sant Millau, patron eus ar barous-mâ
Adieu, querent ha mignonet, cessit brêma da vouëla.
Pedit Doue hac ar Verc'hes da gavet soign ac hanomp,
Hac hon Æl-mad d'hor c'hunduo partout elec'h ma ze-
fomp,

Adieu, va mab, va esperanç, eme an tad desolet;
Piou a gonsolo da dud paour goude ma yi partiet?
Pa vin accablet gant cosni, me vo clévet o laret;
Ma vije va mab qez er guér, en dije va soulajet.

Clévit ar vam o qimiad ive digant e buguel:
Deus amâ c'hoas ma poqin eur voech qent egnat mervel,
Aben ma retorni d'ar guér, me vo èd eus ar bed-mâ
Deus amân etre va divrec'h evit ar voech diveza.

A guichen ar moment fatal ma c'heus tennet d'ar billet,
Bennos vel ma fot din cousket, me a seblant da velet
O tont eus eur gombat sanglant, var eur chariot blesset
Pe tolet en eun hospital, gant an oll abandonet.

Ar soudard yaouang contristet c'hoas qent eguet partia
Evit essât o c'honsoli a lavar, en eur vouela:
Tavid, va zad ha va mam baour, ha bevit en esperanç,
Doue, tad a vizericord, a so bras e brovidanç.

Goude ma vo fin d'ar brezel ha goneet ar victoar,
Gant graç Doue hag ar Verc'hes; e vezò fin d'ho clac'har.
Evit merq eus hor vaillantis, gant lore deus hon tocou,
Ni a zistroyo prest d'ar guér evit sec'hi a taçlou.

Adieu da baros Plouillau ha de oll habitantet
Adieu d'hon oll anaoudeguez, ha querent ha mignonet:
Ha ma na memp qet ar boneur er bed-mâ d'en em velet,
Grac' deomp ebars er barados assemblés d'en em gavet.